

**Troude ha Milin : Ar marvailler brezoneg pe Marvailloù brezoneg**, dastumet gand ar horonal **A. Troude** ha **G. Milin** (ar galleg a zo dirag ar brezoneg). Brest 1870.

Notennou : Modernnaet eo bet an doare-skriva. N'eo ket gwir e vefe galleg e-barz. Skrivet eo gand an dorn al leor a zo bet prestet din gand Skol-Veur Vrést.

**Troude** : Brést 1803 – Brést 1885). Levezonet eo Troude, gwechou 'zo, gand ereadurez ar galleg.

\*

## Kristof

Tost da Zouarnenez ez oa o chom gwechall eun intañvez koz ; bremañ ez eus nousped kant vloaz. Houmañ, an intañvez-mañ, n'he-doa nemed eur mab a reed Kristof anezañ. Ar vamm a glaske e barea dioh e ziegi, rag Kristof, war zigarez ma lavared ez oa diod a-vihanig, n'en-doa greet netra biskoaz euz e gorv, nemed beb an amzer dastum tammouigou keuneud d'e vamm. Evel-se, en-doa paket ar paotr-mañ e hwezeg vloaz pe war-dro, heb beza biskoaz torret e gorv gand al labour. Kenta tra a ree bemdez pa zave, a oa redeg d'an aod gand eur vaz penn-kamm en-doa ; ganti e taole meinigou er mor.

Eun devez, ar vamm a lavaras da Gristof :

« Mar kerez mond da glask keuneud din hirio, me a raio dit krampouez gand ar bleud amboa bet deh en aluzenn digand an dud vad. »

Kristof a lavaras :

« N'em-eus ket a naon, va mamm. »

Ha kuit ahano adarre gand e vaz d'an aod. Tre a oa ; Kristof a ya da gaoud ar mor, diskenn a ra pell en aod hag en em gaoud a ra gand eur poull-mor ; c'hoari a ra eno ha teurel mein en dour, en eur hoarzin hag o kana peb eil. Eur pennad a oa ma'z edo evel-se o c'hoari, pa gemer eur mênig gwenn-kann en eur lavared :

« Sad' amañ eur mên hag a yelo bremaig war gorre ar poull-ze. »

Teurel a ra anezañ gand e vaz, ker brao ha tra (eur c'hoarier mad 'oa deuet da veza), ma rikl ar mên evel eur zilienn wenn war an dour. Kristof a zell outañ, en eur hoarzin a-bouez e benn, hag a wel eur peskig bihan o lammed hag o neuñv endra 'hall war-lerh e vên.

« Deport, deport, eme Gristof, va mamm bremaig a lavare e raje krampouez din mar karjen klask keuneud dezi ; n'eo ket krampouez a vezo ; c'hwi, peskig, eo ; Kristof en-devezo pesked, pe e vezo diêz braz. »

Kristof neuze a droñs e vragez, a ya er poull hag a red war-lerh ar pesk. Hemañ a rikl euz a zindan eur mên dindan eun all, ha Kristof, e vaz gantañ, ne ro ehan ebed d'ar pesk, ken na oe paket.

« Ahanta, va feski-me, n'em-boa-me ket lavaret deoh e vijeh paket ? »

« Ya da, paket on ganez, eme ar pesk da Gristof. Evelato e ve gwell dit leuskel ahanon er mor eged va debri, rag n'az-pe ket kalz a dra diouzin ; e leh mar kerez va leuskel er mor, me a roio dit kement tra az-pezo c'hoant da gaoud, kement tra a houlenni diganen. »

Kristof, souezet o klevet ar pesk, hag hep soñjal hirroh, a daol anezañ diohtu en dour hag a chom eno da hoari eur pennad c'hoaz. En eur hoari, e teu naon d'ar paotr, ha da zoñj dezañ e krampouez e vamm, hag er heuneud a oa bet lavaret dezañ dastum.

“Sell, sell, eme Kristof, ma ve gwir en-deus lavaret ar pesk bihan din, va mamm he-defe keuneud evid eur pennad mad.”

Ha Kristof da redeg ahano, buanna ma hell, war-zu kêr-Iz a oa tost. P'en em gavas, e oa tre braz anezi atao ha dizeh war-dro kêr. Kristof a oa eet di evid kaoud eur pez pikol gwezenn zero a oa, a lavared, e-kreiz ar mor, dirag Kêr-Iz, nousped kant vloaz a oa, ha n'en-doa gellet

den ebed biskoaz kaoud anezi. N'oa ken ano nemed euz ar wezenn zero vraz-se. Hounnez, eme ar re ouizieg, a oa bet ar penn kenta ha, koulz lavared, a n diazez euz ar gêr vraz-se. »

« Dre nerz va fesk bihan, eme Kristof, ma teufe ar wezenn-ze amañ er-mêz euz ar mor ! »

N'oa ket peurlavaret e her gand Kristof, ma welas hemañ korv ha skourrou hag all ar wezenn-ze o sevel war ar mor evel eul lestr, o neuñv hag o tond etrezeg ennañ war ar zeh.

« Gwir eo en-deus lavaret ar pesk ; hennez n'eo ket gaouiad evel an dud ; bremañ va mamm he-devezo keuneud da ober krampouez. »

Kristof a ree an dro d'ar wezenn, a zelle outi, souezet o weled peger braz 'oa. E-leh deliou, he brankou a oa outo kregin istr, meskl, brennig ha rigadell, hag oh he gwriziou kemend-all.

« N'eus forz, emezañ, n'eo ket a-walh e ve deut euz ar mor, red eo ivez e teufe da di va mamm. »

« Kas anezi, va feskig bihan, eme Kristof, ha me a-haoliad warnezi, evel war gein eur marh. Baleet eta dindanon, dre ruiou Kêr-Iz, ha ra zeuio an oll da zelled ouzin o tremen, hag ar roue Gradlon ivez gand ar re all. »

Diohtu Kristof en em gavas war ar wezenn zero a lohas a zindanañ, ne ouie penaoz. Mond a ra dre ruiou Kêr-Iz a zo leun ganti beteg lein an tiez ; an oll a zo mantret o weled kemend-all.

« Sell, sell, emezo, Kristof war eur pezh gwezenn zero ; bale a ra dindani, evel pa ve eur marh beo e ve ; biskoaz tra ker burzuduz ! Kristof ! Keistof !, eme an oll, chom eur pennad a-zav ! »

Kristof, avad, war e wezenn zero, a yee atao, en eur hoarzin oh o hleved.

En em gaved dirag lez ar roue Gradlon, hemañ, o klevet an trouz a oa, a ya ivez da zelled, e verh Ahez en e gichenn.

« Gwelit, va zad, eme houmañ, Kristof eo a zo o tremen war eur wezenn ; o c'hoari marhig ema, a gav din, e vaz penn-kamm gantañ. »

« Ya da, eme Kristof, me eo, plah koant ; ha dre nerz va feskig bihan, pa emaoñ oh ober goap, me garfe e veh-hu dougerez a-vremañ. »

Goude lavared an dra-ze, Kristof a ya ahano, war e wezenn, da di e vamm. Ne oe ket pell en hent ; diskenn a ra d'an traoñ, ha da gaoud e vamm da lavared dezi dond da zelled.

« Sada deuet keuneud deoh, va mamm, da ober krampouez. »

« Degas anezo en ti », eme houmañ.

« A ! ya, eme Kristof, c'hwi 'lavar a-walh, va mamm ; deut da weled pebez beh keuneud a zo aze er-mêz. »

Ar vamm a ya da heul he mab, hag a chom sebezet oll dirag eur wezenn zero spontuz, ker braz eo. Uhelloh 'oa c'hweh gwech evid ti-soul an intañvez.

« Gand piou, emezi, eo deuet ar wezenn-mañ amañ ? N'eo ket ganez-te, emichañs ? »

« Eo da, va mamm, ganen-me eo deuet, ha bremaig e welot e vezo faoutet ha berniet aze dirag ho ti. »

Ar pezh a lavaras Kristof a oe greet diohtu, ha n'en-doe ken poan nemed goulenn an dra-ze digand e besk bihan. Pa oe greet ar bern keuneud, ez oa teir gwech ledannoh hag uhelloh evdi ti an intañvez paour.

« Ahanta, eme Kristof, bremañ ho-pezo keuneud a-walh da ober krampouez kement hag a gerot. »

Ar hrampouez a oe greet neuze ha debret, ha Kristof d'an aod adarre da hoari gand e vaz-kamm.

Evitañ da veza lakaet diod gand an dud, Kristof n'oa tamm diod anezañ, evel a welot. Bremañ, o veza n'en-doa ezomm ebed da vond da glask keuneud, Kristof a hoarie, gwalh e galon, e besk bihan ankounac'haet krenn gantañ ; ha biskoaz ne zeuas en e benn lakaad e besk bihan da rei dezañ arhant, na boued d'e vamm ha dezañ e-unan. Evel a ree a-raog e reas da

houde, ha nemed e vije e vaz penn-kamm gantañ d'e harpa ha da hoari, ne zoñje e netra ebed ken.

A-benn eur pevar pe bemp miz goude-ze, e savas brud dre ar vro 'oa dougerez merh ar roue Gradlon ; n'oa ken ano nemed euz an dra-ze, hag ar pezh a oa gwir eo e teue ar briñsez Ahez tevoh-teva bemdez. Kement-mañ a yeas e berr amzer a henou da henou beteg ar roue Gradlon. Hemañ, da genta, n'oe ket evid kredi ez oa gwir a lavared.

« Biskoaz, emezañ, n'eus bet gwaz, nemedon-me, war-dro Ahez ; va aket a zo bet atao, abaoe ma'z eo ganet, da ziwall anezi diou peb darempred fall, hag ohpenn, re fur ha re zantel eo, kared ahanon a ra re evid dond da ober biken eur pehed ker braz all, hag a rafe din kemend a boan. Nann, nann, gaou eo kement-se, ha teodou fall hebmuiken eo a lavar an dra-ze. »

Evelato a zeiz da zeiz, ar briñsez a stegne he dillad en-dro dezi, ha bemdez ivez ar brud a greske kement ma lavaras ar roue ez oa red gweled. Mond a ra da gaoud e verh, ha lavared a ra dezi petra a zo a-nevez diwar he fenn.

« E feiz, va zad, emezi, souezet on va-unan gand ar pezh a hoarvez, rag brasaad bemdez a ra va hov, ha ne ven ket evid lavared deoh petra a zo o c'hoari ganen. »

Gradlon a gare meurbed e verh hag a lezas anezi c'hoaz eur pennad heb gouzoud petra vije diwezatoh. Diskred en-deus evelato ha lavared a ra outañ e-unan :

“Ne fell ket dezi anzav ouzin ar wirionez, na lavared da biou eo ; gwelet e vezo, pa vezo ar mare.”

Deuet heh amzer, Ahez a wilioudas, hag he-devoe eur mab. Neuze, Gradlon a lavaras d'e verh :

« Bremañ ne dalv ket dit nah ouzin ; deuet eo ar brud da wir. Sada-te gwilioudet, ha ganet eh-eus eur mab bihan ; lavar bremañ din piou eo e dad. »

« Mar goufen, va zad, ne ve ket diêz din lavared deoh ; hogen, gwasa a zo, ne ouzon ket, kennebeud ha ma ouzoh hoh-unan, penaoz eo c'hoarvezet an dra-mañ ganen. »

Ahez 'oa ar verh a ouele o komz evel-se oh he zad ; hemañ, heb lavared ger, a yeas ahano nehet hag o skrabad e benn.

“Gwir eo marteze a lavar va merh din, ha kredi a-walh a rafen e ve, rag gwaz ebed n'en-deus morse lakaet e dreid en he hambr ; evelato eo red din gouzoud, mar gellan, piou eo tad ar bugel.”

Neuze Gradlon a gas kemenn da eun drouiz koz-kozh, a oa peder leo pe war-dro ahano, da zond d'e gaoud ar henta ar gwella. Henez a oa o chom en eur hoad braz ; kuitaet en-doa Gradlon eur pennad mad a oa, petra bennag ma'z oa bet hemañ skoliet ha desket gantañ. Beleg braz an doueou faoz 'oa, ha diou kleved an dud, n'oa netra a gement na ouie, ken en amzer dremenet, ken en amzer da zond.

En em gavet eta an drouiz koz, Gradlon a lavar dezañ petra 'zo :

« Va merh a zo deuet brazez, hag he-deus ganet, daou zevez 'zo, eur bugel ne oar ket, emezi, piou eo e dad. Goulennet em-eus outi va-unan, ha bewech em-eus klevet ganti ne ouie penaoz 'oa c'hoarvezet an dra-ze. Koulskoude ez eo arabad e chomfe ar bugel-ze heb tad, pa dle beza unan pe unan. »

« Ya da, eme an drouiz koz, ne hell beza bugel hep tad, na netra hep krouer. Selaouit, roue, mar fell deoh anaoud piou eo tad mab ho merh, stagit ho kurunenn etre daou bost koad gand eun neudenn lin gwenn, e-kreiz leur-gêr, ha neuze lakit, d'an deiz kenta euz al loar nevez, kement hini a zo e kêr ha war-dro, da dremen dindani. Arabad eo mired oh den ebed avad, gand aon na ve henez eo a ve tad ar bugel, a anavezot êz, rag war e benn e kouezo ar gurunenn, diohtu ma'z aio dindani. Rag-se eta evesait mad, ha grit penn-da-benn ar pezh a lavaran amañ deoh. »

Goude kement-mañ, an drouiz koz a zistroas d'e goad, ha ne oe mui klevet ano ebed anezañ. Gradlon, hebdale, a laka embann da dud kêr ha d'an oll tro-war-dro, en em gaoud war leur-gêr Iz an deiz-mañ-deiz.

An oll a houlen an eil oh egile :

« Petra a zo a-nevez, ha diwar-benn petra eo ? »

Kristof, pa glevas gand e vamm petra 'oa, a lavaras :

« Mar deo galvet an oll da vond da Gêr-Iz, me a yelo ivez da houzoud petra a zo. »

Mond a reas Kristof ; eun tammig evelato 'oa diwevad. Pa en em gavas, e oe souezet o weled kurunenn ar roue a-ispill. Meur a hini a oa tremenet dindani, heb na zistage tamm. Ar re vraz o-doa kargou e lez ar roue a oa eet da genta, ar vourhizien goude, ha da ziweza ar re diwar ar mêz hag ar beorien

« Mad, eme Kristof, pa'z a an oll, me 'hell mond ivez, emichañs. »

Hag hemañ neuze ha tostaad. Edo o vond da dremen, pa grogas en e vreh unan euz ar zoudarded a oa e gwardou ar roue

« Da beleh ez ez-te, diod ma'z out ? N'eus ezomm ebed ahanout amañ ! ».

« List hen, eme ar roue, en-doa gwelet pellaad Kristof, ne fell ket din e ve miret oh den ebed da dremen dindan va hurunenn hirio. »

Ha Kristof ha mond neuze. Diohtu m'en em gavas dindan, e kouezas kurunenn ar roue Gradlon war e benn. Setu an oll souezet mar boe biskoaz :

« Kristof eo, eme e-leiz ; Kristof a zo tad mab Ahez. »

« N'eo ket, n'eo ket, eme ar re all, hag ar roue evelto. Eun diod evel hennez n'en-deus komzet biskoaz oh Ahez. Eur briñsez evelti, hag-hi a garfe biken eur paour-kêz, eur genaoueg evel Kristof ? Tra, tra, red eo gweled eur wech c'hoaz. »

Ma oe staget ar gurunenn adarre, ha lakaet Kristof da vond dindani.

Diohtu ma oe eno, an neudenn a dorr hag ar gurunenn a gouez adarre war penn Kristof.

« Evid bremañ, eme an oll, ne dalv ket lavared mui ne ve ket Kristof tad mab bihan Ahez, rag bez' ez eo. »

Ma oe kroget diohtu e Kristof ha kaset da lez ar roue da gaoud ar briñsez. Gradlon neuze a lavaras da Ahez :

« Setu kavet tad da vab. »

« Hennez, an diod-se, eme ar briñsez, ne deo ket tad d'am mab-me. Anaoud anezañ a ran, evid gwir ; biskoaz avad n'em-eus bet darempred gantañ na gand gwaz all ebed. »

« N'eus forz petra a liviri, eme ar roue ; hemañ 'zo kouezet va hurunenn a-benn diou wech war e benn, ha gantañ eo e ranki dimezi. »

« Koulz e ve ganin mervel », eme Ahez.

« Pe e varvi, pe ne ri ket, dimezi gantañ a ri, hag hebdale c'hoaz ! »

Greet e oe an eured ha dimezet Kristof gand Ahez. A-benn eur pennad goude-ze, Gradlon, o weled petra 'oa e vab-kaer, evid mired na welje mui anezañ dirag e zaoulagad, na pehed e verh ivez, a lakeas ober eur hombod koad, ha pa oe greet, e lakeas e-barz Ahez, e vab-bihan ha Kristof, ha goude o stlapa o-zri er mor da veuzi, pe evel a garje an Aotrou Doue da ober anezo. Ahez ne ree nemed gouela, en eur lavared e rankje mervel eno.

Kristof, ankounac'haet e besk gantañ beteg neuze, a lavaras d'ar briñsez :

« Ho-pezet fiziañs, ne varvot ket, na me kennebeud. »

Hag eñ ha lavared goude :

« Va feskig bihan, ra vem-ni er hombod-mañ war ar zeh en eun enezenn a zavo tost amañ. »

Ma en em gavjont en enezenn-ze diohtu.

« Kavoud a ra din, eme Ahez, ne loh mui ar hombod. »

« Nann da, eme Kristof, ne loh mui ; bez' ema war eun enezenn... Ra vezo ar hombod e ludu, va feskig. »

Ma oe gwelet ar hombod evel o teuzi, ha ma savas an tri-mañ ahano, Ahez souezet, a hellit kredi, o weled petra a hoarveze ganto.

Ar re-mañ eet d'an enezenn hag o weled n'oa enni na ti na tra, Ahez a lavaras da Kristof :

« Amañ e rankim mervel gand an naon dindan an amzer. »

« Ne raim ket, emezañ ; kaoud a raim, a-barz an noz, peadra da veva, ha ti da chom e-barz. »

« Bezet amañ diohtu, eme Kristof, eur maner kaerroh evid na deo lez ar roue Gradlon e Kêr-Iz, hag e-barz, peadra da veva, ha tud da zervija Ahez, ha tro-war-dro gwez ha liorzou ar re gaerra a ve gwelet. Bezet ivez eur pont kaer ahann da Gêr-Iz. »

Ha setu greet diohtu kement tra a houlenas Kristof ; an dra-mañ a oa d'ar pardaez.

Ahez, naon dezi, a zebras hag a evas, hag a yeas da gousked ; n'oa ket war ar holo 'oa avad. Kristof a yeas ivez, goude ober eur bale dre an enezenn.

Antronoz, kenta tiz en-doe Gradlon, 'oe kleved dond d'e gaoud unan euz ar re vraz euz e lez da lavared dezañ :

« Deut, roue, da zelled er-mêz ; du-ze ez eus savet, abaoe deh, eur pont hag a laka an oll souezet ; biskoaz n'eus bet gwelet kaerroh pont ; ha kaer a zo c'hoaz eo gweled er penn all dezañ, en eun enezenn, ne oar den ano anezi, eul lez ker kaer n'om ket evid gweled petra eo, kemend e lugern an heol diwarnañ. »

Gradlon ne oe ket diwevad da vond da zelled, ha pa welas petra 'oa, e kasas unan euz e dud da houzoud piou a oa o chom e-barz. Hemañ, p'en em gav en enezenn, a wel ar maner kaer ; mond a ra e-barz ha gweled Kristof, e vaz-kamm en e zorn.

Kannad ar roue a lavaras da Gristof :

« C'hwi eo, a gredan, mestr an enezenn-mañ ? »

« Ya da, eme Kristof, me eo ar mestr amañ, a gredan ; ha n'eo ket c'hwi, na den ebed, a ve evid lakaad e wir e-leh va hini-me. »

« N'eo ket an dra-ze eo, eme ar hannad, me 'zo deut da lavared deoh dond da gaoud ar roue Gradlon da Gêr-Iz. »

« Mond da gaoud ar roue Gradlon ? eme Kristof ; mar en-deus ezomm ahanon-me, e teuio e-unan amañ, rag evidon-me, ne rin kammed da vond etrezeg ennañ. It en-dro eta, ha livirit petra eo ho kefridi. »

Kannad Gradlon a yeas ahano hag a lavaras petra en-doa gwelet ha petra a oa bet lavaret dezañ gand Kristof.

« Petra, eme ar roue, Kristof diod eo a zo eno el lez kaer-ze ? Deut eo rog an tamm anezañ, evid doare ; me 'welo pe baotr eo bremaig. »

Ha Gradlon neuze kemenn da zoudarded mond d'an enezenn da zegas dezañ Kristof diwarbouez e ziskouarn.

Kristof a oa war-hed anezo. Pa o gwelas o tond, ez eas da zelled outo euz e brenest, ha pa oent en em gavet, e houlenas :

« Ahanta, va zud, petra 'zo a-nevez gand Gradlon, e Kêr-Iz ? »

« Ar pez a zo a-nevez eo e rankot dond ganeom, pa ma ne deuit ket bremaig, ni 'grog en ho kabiez. »

« C'hwi, koz paotred fall ; me 'lavar ne vezo ket êz deoh. »

Ar re-mañ neuze a glask an dro da gaoud Kristof. Hemañ avad a laka eur vandenn zoudarded all da zond eno da hoari oh paotred ar roue, ha ker brao e hourenjont outo, ma oe teurket tud ar roue ha lazet, nemed unan a yeas da gas ar helou da Gêr-Iz. Gradlon, pa glevas petra a oa bet, a yeas eun droug spontuz ennañ.

« Petra, emezañ, eur hoz diod evel hennez a garzo ouzin ! Mil den amañ diohtu, ha war-lerh Kristof, da zegas anezañ din, beo pe varo. »

Kristof, war-hed atao, a welas anezo o tond :

« Peskig, emezañ, degas din tud da flastra tud Gradlon. Mall eo degas skiant e penn ar roue diod-se ; kaoud a ra dezañ, moarvad, n'en-deus nemed lavared evid ober evel a fell dezañ. Gwelet e vezo piou a vezo ar mestr etrezom-ni on-daou. »

Ha setu tud o tond eno da Gristof.

P'en em gavas tud Gradlon, e savas ar c'hoari. Ar re-mañ diweza a oa eur frota warnezo, ma rankjont koueza eno a-stok o horv, ha mervel oll nemed unan adarre.

« Ahanta, eme Gristof, gwelloh oh bremañ, va zud ? Me am-boa lavaret deoh ; ne fell ket deoh senti ouzin ; gwaz a ze ! »

Ar roue Gradlon, pa glevas peseurt c'hoari a oa bet adarre, a lavaras :

« Kentoh evid beza trehet gand an diod-se, me 'fell din ez afe kement soudard am-eus bremañ d'e gerhad din. »

Lakaet e oe ar re vrasa euz al lez da ren anezo, hag ez ejont raktal.

« Deut atao, eme Kristof, o selled outo. Ne viot ket gwelloh evid ar re all, ha kaer en-devezo ho mestr, dond a raio e-unan d'am haoud ha pa ne fellfe ket dezañ. Evidon-me ne lohin ket euz va enezenn. »

Ar re-mañ, ar zoudarded-mañ da Hradlon, a oe lazet oll adarre, ha ne zistroas hini en-dro nemed unan da lavared d'ar roue ne vije birviken treh da Gristof, ha mond e-unan d'e gaoud, mar en-doa c'hoant da gomz outañ.

« Pa'z eo red mad din mond, ez in, eme ar roue ; gweled a rankan petra a zo o c'hoari gand Kristof. »

Ar roue Gradlon, en em gavet gand tud e lez an enezenn, a oe souezet, mar boe biskoaz, o weled peger kaer maner a oa eno. Kavoud a ra Kristof, hag hemañ krog en e vaz, hag heb lamed e voned diwar e benn, a lavar d'ar roue :

« Ahanta, deut oh 'ta d'am haoud, roue ; mad hoh-eus greet, rag evidon-me n'em-eus ezomm ebed ahanoh, ha ne vijen eet birviken d'ho kêr, pa hoh-eus kaset ahanon kuit. »

« Petra eo dit, eme ar roue, laza va zud evel a rez ? »

« Laza ho tud, eme Kristof, me n'em-eus greet droug ebed dezo. Setu emaint aze morfilet, ha ma karjent beza chomet sioul hag e peoh, ne vije c'hoarvezet droug ebed ganto. Klevit mad, roue, n'eo ket ar boan da zen, na deoh, na da re all, klask ober trouz amañ ; me eo ar mestr ha ne blegin da zen ebed. Evelato, mar kirit, me 'zo o vond da gerhad ho merh deoh, evid ma'z eot ganti da ober eun dro dre al liorzou hag ar hoajou a zo dre aze, da hortoz debri ho lein, rag pedi a ran ahanoh da leina em zi. »

« Peadra hoh-eus da rei deom ? « , eme ar roue.

« Peadra a-walh a zo, hag emichañs e vezo c'hoaz war ho lerh, a-drugarez Doue. »

« Mad eo neuze, eme ar roue, leina a rin amañ, me ha va zud. »

Neuze Kristof a ya d'e gêr hag a ra eul lein euz ar seurt ne vez ket aliez, zoken e tiez ar rouanez. Nemed aour hag arhant ne weled ken war an daol, ha da zervija e teuas eur maread a blahed yaouank, gwisket e gwenn-kann oll. Gradlon, greet e dro dre ar hoajou, a zeu d'ar maner, mond a ra oh taol, eñ hag e dud ; mantret int oll o weled kemend-all a draou kaer ; Gradlon a houlenn ouz e verh penaoz e hell Kristof kaoud kemend-all a binvidigeziou.

« Ne oufen ket lavared deoh, va zad, emezi, rag ne ouzon ket va-unan ; me 'gred, Kristof en-deus pep tra diou e houlenn. Sada touzierou lien gwenn, arhanteri, hanafou aour hag arhant da eva gwin euz ar gwella, ha boued da zebri, ha biskoaz n'int bet prenet gand Kristof. Dezañ int deuet avad ; penaoz ? Ne ouzon doare kennebeud ha c'hwi. »

« N'eus forz penaoz eo, eme ar roue, naon on-eus, traou 'zo da zebri, stagom ganti. »

Kristof en em gav gand e vamm, hag a lavar :

« Bremañ, Gradlon, deom oh taol ; azezit aze e-kichenn va mamm, rag eviti da veza gwreg eur pesketaer paour, ne vezo ket mez deoh leina ganti ; ne vije ket brao lezel va mamm da zebri he boued diwar an aluzenn, pa'z eo dimezet he mab da verh ar roue. »

Gradlon, daoust ma kare ar re baour ha dister, a vije bet gwelloh gantañ beza pell diou an hini goz-se ; evelato ne gredas ket lavared ger, rag douja eun draig a ree da Gristof. Hemañ a azezas er penn uhella euz an daol ; Ahez en tu dehou dezañ ; e vamm en tu kleiz, ha Gradlon war he lerh.

Pa vez naon ha traou da zebri, ne vez ket diêz an doare. Gradlon hag ar re all a stagas ganti ; ar re-mañ a zebras hag a evas gwalh o halon, ha pa oent savet dioh an daol, Kristof a lavaras :

« Mar kirit, roue, ez aim da ober eun dro dre al lez, ha da weled hag-eñ a zo ker goullou, ken aveleg ha ma'z eo braz. Lavared a reer ez eo

Gwelloh eun ti bihan ha bouedeg

Evid eun ti braz hag aveleg. »

Maner Kristof, klevit mad, n'eo ket eur hoz maner 'oa ; peder gambr warn-ugent a oa e-barz, hag e pep kambr pevar brenest troet oh ar pevar avel ; ne weled nemed berniou aour hag arhant, nemed goloennou seiz, nemed taolennou kaer ar seurt n'oa bet biskoaz e ti ar roue e-unan. Hemañ a zigore e henou dre ma'z ee, hag a chome da zelled outo.

« Ahanta, eme Kristof, pe va zi-me, pe hoh-hini-c'hwi, roue, eo ar haerra ? »

« Da hini eo, eme ar roue ; ya, mar deo dit eo ? »

« Ne gredan ket e ve da zen all ebed, na deoh kennebeud all. Kaoud a ree deoh, moarvad, e vijen-me bet beuzet, hag ho merh ivez ganen, pa hoh-eus greet teurel ahanom er mor. Bremañ oh souezet, ha n'eo ket gwir ? Mad ! mad ! gwell a ze ; an dra-mañ a zesko skiant deoh. »

Ar roue, skuiz o kleved komzou frêz Kristof, a lavaras neuze mond kuit.

« Pa gerot, eme Kristof. Dre an hent m'oh deut e hellit distrei d'ho kêr ; evelato e kav din, pa vez debret ha pa vezer bet bouetet mad, ne deo ket brao laerez tud an ti-ze. »

« Piou a zo laer ? », eme ar roue, ar gwad o tond dindan e ivinou.

« Ne ouzon muioh evidoh-c'hwi piou eo al laer, ha gouzoud a rafen evelato. »

« Gouezet e vezo, eme ar roue, ha diohtu zoken. Petra 'zo diank dit, Kristof ? »

« An hanaf kaerra am-boa eo ; an hini a oa greet gand eur mên kaer hepken. Bremaig edo ganeoh, oh eva oh taol. »

« Gweled gand piou eo bet kemeret a zo red. »

Ma lakaas Gradlon furcha e godellou ar re a oa gantañ oh e heul. Kaer avad a oe furcha ha difurcha, hanaf ebed ne oe kavet.

« Gand unan bennag e rank beza, koulskoude, eme Kristof. Klaskit en ho kodellou, c'hwi bremañ, roue. »

« Ganen-me n'eus bet kemeret netra, eme hemañ, ha kredi a rez-te, diod fall ma'z out, ez on-me eul laer ? »

« Ne lavaran ket deoh e veh laer, evelato e kav din e ve brao, pa'z eo bet furchet an oll, e veh furchet ivez. »

« Ma n'eus nemed an dra-ze da ober, ne vezo ket pell an abadenn. »

Ha Gradlon ha planta e zaou zorn en e hodellou a bep tu, ha tenna gand e zorn dehou an hanaf a oa 'leiz a graban anezi.

« Ahanta, eme Kristof, o c'hoarzin goap ; piou eo al laer bremañ ? »

« Kredi a ve greet, eme ar roue, eo me eo, ha koulskoude n'eo ket me eo am-eus lakaet an hanaf-se em godell. »

« Kaer ho-po nah, roue, eme Kristof, piou a ve evid kredi ahanoh, ma na lavarfen-me ket ar wirionez ? Ar pezh hoh-eus lavaret a zo gwir ; n'eo ket c'hwi hoh-eus lakaet an hanaf-se en ho kodell. Eet eo e-barz evel ma'z eo eet e kov ho merh ar mab he-deus ganet. »

Gradlon a oe neuze eur pennad e spered e sav, o trei hag o tistrei war ar pezh en-doa klevet gand Kristof. Pa zeuas ennañ e-unan, e oa laouen hag e lavaras :

« Muioh a skiant hag a spered eh-eus, te, Kristof, evid kement hini ma'z om amañ, ha mar kerez dond ganen da Gêr-Iz, te ha da wreg hag he mab, e vezi roue war va lerh. »

« Ne din ket, eme Kristof, it d'ho kêr pa gerot ; me a chomo amañ, gwelloh eo ganen. Ho Kêr-Iz, roue, ne bado ket pell amzer mui, rag me am-eus tennet ar wezenn zero vraz a oa o vired oh ar mor da zimalled warnezi, kenta reverzi a vezo. Roue, n'ankounac'hait ket ar pezh a lavaran deoh : Kêr-Iz a vezo goloet gand an dour-mor. »

Ar pez a lavaras Kristof da Hradlon a hoarvezas, hag anez e varh, hemañ a vije bet kollet evel ma oe tud ar gêr a Iz. Evid Kristof, n'eus bet ano anezañ abaoe, ha ne oar den da be leh eo eet gand ar vamm hag he mab.